

**Sant Julian.**      206 – L : t : 2

Juluanik zo eun den vaillant  
a ligne nobl ag excellent (1)

eun deis e iäs eb lakat mar  
d'ar c'hoad en avis chasseal.

er c'hoad pa zeo arruet  
ur c'haro neus bed rankontret

– Perag e mezan em euillez  
nemed evit kaout va buhez.

mar am lazez te a lazo  
ta tad a da vam en eun dro.

Possubl e ve ar c'hraoadur  
ar poan zo bed oc'h e vezur.

a lasfe e vam ag e dad  
Biken james na rae fin vad.

me kuitafe kentoc'h ar vro  
ewid ne lasfen a nezo.

Setu Juluanik kuitet  
e mez ar bro ind *any*(2) eo ed.

erruet en ti an ini en harie  
evel unan deus e vugale.

pa voa bed enon eur pel bras  
Koms e zimizi a deuas  
Da eun dimezel a ti bras

Pa voant hi dimezet o daou  
voa roet dezo eun argoulao  
eur c'hastel gaer dezo o daou.

Juluanik er ger ne voa ket  
 e c'hreg e voa e klevet  
 e dad evam o choulen loja  
 deus e verc'h kaër ken humbla tra.

– Debonjour deoc'h daou zen ansien (3)  
 daou zen ansien dime leveret  
 pelec'h a duet a ma noc'h bed,  
 na mo heus esper da vonet.

E klasq or mab a zo dianket  
 Julianet e zeo anvet.

E mom partout er vro e valle  
 N'eblec'h ne klevomp e zoare.

daou zen ansien deud e ti  
 me roïo deoc'h da eva da zrebi.

Ho zreïd dezo e deus goalc'het  
 en he goële e deus-hi laket.

d'an offern pemp heur hi zo ed,  
 Julianik dar ger zo erruet  
 e dad e vam a neus lazet.  
 e c'hreg er ger a zo arruet  
 Digat-hi e deus goulennet :

Petra an daou man o poa lojet  
 o poa en ho koelle laket ?

Or tad or mam ma Juluan  
 a voa en irvoud ag e poan  
 a voa dre ar vro e valle  
 Neb lec'h na klevont o doare.

– Itron Varia viniget  
 koms ar c'haro zo c'hoarvezet

ar c'haro en doa lavaret din mad  
 e lac'hjen va mam a va zad.

me ia breman dar rinvier Jourdren  
eur plas brao evid ober pinijen.

Na mar dit-hu me iel ive  
Ordrenet e demp gant doue  
D'an eil briet euilla e gile.

Jannton Puil, 16 juin 1851.

(1) a tinal de excellent, corrigé de : e.

(2) Mot(s) : *end any* douteux.

(3) L's de ansien est une correction de c.